

AR GOULENN-DIMEZI

PEZ-C'HOARI
en eun arvest

reñket e brezoneg diwar

Anton TCHEC'HOV

gand

A. KERAVEL

PEZIOU-C'HOARI YANN GOUËR

Bet embannet evid ar wech kenta e 1947

TUD AR C'HOARI

LOM BOUZELLOG, 35 bloaz, anezañ eun den maget-mad, liou ar yehed war e zioujod,

STEFEN SKRAGN, intañv, 60 vloaz.

KATELLIG, merh **Stefen**, 25 bloaz.

E ti Stefen. Eun daol, diou gador, eur skaoñ.

Lom a deu tre, chupenn lost-pig ha manegou gwenn gantañ.

Stefen

(*A ya etrezeg ennañ, hag eh astenn e zorn dezañ*).

Ahanta, Lom Bouzellog, va hamalad Lom Bouzellog ! Pegen eüruz ouz ho kweled, va mab (*starda a ra e zorn dezañ*). Keid all a zo n'am-eus ket gwelet ho penn. Eur blijadur, m'hen tou ! Ha penaoz ema ar bed ganeoh, mignon ?

Lom

Braoig, mad-tre, Stefen Kergidavreg ! Na ganeoh ?

Stefen

Ker braoig all, va mab, ker braoig all. Azezit 'ta, va faotr. Petra 'hoari ganeoh pa n'on-eus ket gwelet ahanoh tro amañ ken pell all zo ? Lom Bouzellog, va honsort, n'eo ket deread deoh dilezel evel-se ho mignoned hag amezeien... Med, lavarit din, petra zo a-nevez ganeoh pa welan ahanoh gwisket-kran evel-se... Chupenn kiz-kêr, ha ler gwenn war ho krohen : emaoh o vond da friko eur mondian bennag da Gemper martez ?

Lom

(*Nehet*). N'on ket, nann ; n'on deut er-mêz va zi hirio nemed da zond beteg ennoh, Stefen Skragn Kergidavreg.

Stefen

Ha neuze 'ta, da ziskouez din ho tillad nevez an hini eo ?... N'ema ket c'hoaz erru deiz kenta a'r bloaz, hañ ?... (*Lom a chom dilavar, Stefen a ginnig dezañ eur gador*) Mad, grit eun azez, kamalad !

(*Lom a gouez war ar gador, hag en em lak da skrabad e hourlañchenn, evel eun den a yafe da vouga.*

Hem ! Hem !

Stefen

(*Redeg a ra da gerhal eur skudellad dour*).

Hopala, va bouchig-me ! Bah ! Bah !... Gortozit : arabad deoh taga en ti-mañ diwar re zehed !... (*Lom a lonk ar banne dour kinniget dezañ*.) Ha bremañ , Lom Bouzellog, ma 'z eo skarzet deoh toull ho kouzoug, lavarit din 'ta frêz ha sklaer ar pez a zo war ho kalon.

Lom

(*Sevel a ra en-dro en e zav*).

Dioustu e ouezoh (*Kregi a ra e breh Stefen*).

Deut on d'ho kaoud, Stefen Kergidavreg, da houlenn diganeoh eun dra... eun dra ha ne... ha na... feiz, eun dra...

Stefen

Eun drêñ a zo krog ennout ?

Lom

(*Gagouillad a ra*).

Neket ! Neket, med... Herri ! Gouzoud a rit, a-viskoaz om bet en em glevet ; meur a wech am-eus bet tro da houlenn diganeoh eun taol-skoaz, ha bep taol, e gwirionez, ho-peus bet greet euz ho kwella evid... Daonet vin, **Stefen**, trefuet ha mesket eun disterra eo va spered d'an eur-mañ. Red eo din paka eur banne all, me lar. Digarezit ahanon, Stefen Kergidavreg. (*Goullonderi a ra ar skudellad dour*).

Stefen

(Outañ e-unan). - Asa ! vi pe labous eo a zo gand da yar, paotr ? Klaoustre eo gand ar verrenteñ-arhant eo taget ar balbouser-mañ... Kee, kee atao, va bihanig, c'hoant 'peus da weled yalh tonton Sfeten. Mad ! e hellez fizioud warno : ne vezoo ket prestet dit eun diner euz va re (*Da Lom*) : Petra zo 'ta, e gwirionez, va mab-me ?

Lom

Setu, setu, Stefen Skragneg... Skragn Skragn Kerstefen... nann ! Stefen Kergida... Oiou ! pegen strafuillet on-me... Ha n'eo ket gwir on strafuillet spontuz ?... Mad, n'eus nemedoh hag a hellfe va zikour en digouez-mañ, daoust ma n'am-eus-me greet netra da... da... da lavared eo... (*En em deurel a ra en e goazez war ar gador*).

Stefen

(*Outañ e-unan adarre*).

Hemañ, an amparfal-mañ, a zo o klask suna arhant diganen-me, re anad eo... Gortoz, va êlig, gand ar forh e vint roet dit, gand ar forh ! (*Da Lom*). Arabad deoh troiata evel-se, paotr paour ! Bremañ eo red deoh gouzoud eo bet kazi rivinet Stefen Kergidavreg ar bloaz-mañ.

Lom

Rivinet, Stefen Kergidavreg ?

Stefen

Ya, rivinet, pe hanter... Va gwiz koz a zo maro evel ma ouozh ; setu aze eiz mil lur kollet, hep konta ar boan...

Lom

Gouzoud a ran, Stefen.

Stefen

Ha va buoh ruz am-eus ranket he gwerza war-goll...

Lom

Ya, med...

Stefen

Penaoz, te Lom Bouzellog, mab eur houér euz an dibab evel ma oa da dad, ha ne gomprenez ket eo eur rivin rankoud rei evid koulz ha netra eur vuoh paeet ken ker all, ha goude maro din eur wiz euz ar henta evel an hini a oa amañ.

Lom

Entent mad a ran... Nemed...

Stefen

Ha va fatatez eet da netra gand ar c'hwiled flériuz-se, hag ar sehor o padoud keid-all, ken na 'z ay da netra ar bern amann a-raog an eost, hag ar gouarnamant o kreski deom an taillou adarre...

Lom

Deoh-c'hwí, din-me ha da bep hini, Stefen, heñvel eo deom...

Stefen

(*Droug ennañ*). Heñvel ? Med perag eta dont da houllenn arhant digand eur paour-kêz koz eveldon ha ne vo ket eur pez ugent real ken war e gont warhoaz, ma talh an traou da drei e-giz ma reont ?

Lom

Goulenn arhant ?... Med n'am-eus ket me goulennet arhant diganeoh, Stefen, ha deut amañ d'hen ober n'on ket... Deut on, deut on da houllenn diganeoh rei din ho merh Katellig e dimezi !... Mad, deut eo ganen an taol-mañ !

Stefen

(*O koueza war ar skaon a zo en e gichenn*). Da glask va merh e oas deut... o ! mabig koant !... da glask va merh ha ne oas ket gouest da lavared kentoh ! Goulenn adarre 'ta, va ranig-me, ma welin hag-eñ em-eus klevet mad...

Lom

(*Sonn war e dachou, hag o tistaga frêz*). An enor am-eus, Stefen Skragn Kergidavreg, da houllenn diganeoh beza ar vadelez rei din...

Stefen

(*O vriata anezañ trumm-ha-trumm, ha da houde oh ober daoig dezañ, war e gov*). - O ! Lomig Kovig Kovok, Lomig Bouzellig Bouzellog, va faotr bihan-me, pebez laouenidigez a lakaez hirio e kalon Stefen goz. (*O vriata anezañ diou wech all*). Sell, laouen on ken n'on laouen a-walh. Pebez kelou !

(*O selloud outañ, krog en e ziouskoaz*). Keid-all a zo ma soñjen en dimezi-se !... Va zoñj-me eo bet a-viskoaz !... Dalhmad em-eus karet ahanout evel eur mab din. Ra zeuio deoh eur grubuillad Bouzelleien vihan... Ra zalho warnoh oll chañs hag eurvad an aotrou Doue e-doug eur vuhez hir... Med, trible ! petra ran-me amañ, amboubal koz ma 'z on, o chom aze dirazout. Koll a ran va fenn, ha koll amzer war ar marhad... Mond a ran da hervel Katellig.

Lom

(*O terhel krog e breh Stefen.*)

Ha kaoud a ra deoh, Stefen, ha kaoud ra deoh em-eus eur chañs bennag e raio-hi ker brao digemer ha c'hwi d'am goulenn ?

Stefen

Ahanta, va bouchig bihan, daoust hag aon kaoud ar sah eo a ree dit balbousad bremaig ?... Merh Skragn Kergidavreg a nahfe eur paotrig gouest ha kreñv eveldout, hag eñ pennhêr gouenn Bouzelleien Toull-ar-Gurun, evelato, ne soñjez ket ! M'hen tou ruz, da zod-pitill eo ez ay ganit, va mab, da zod...

Mond a ran d'he herhad dit : ema o lakaad da zena an torad moh bihan nevez bet, - rag ma 'z eus maro amañ eur wiz koz, peadra a oa en ti da brena unan all raktal, te oar (*Da Lom, e pleg e skouarn*). Pa zeuio Katellig amañ, lavar dezi ar pez a zo dleet, hag arabad dit beza nehett evel bremaig... Ar

merhed n'eus ket da glask troidella ganto, nemed mel a vefe en da gomzou... Kee dezi hardiz (*O rei dezañ eur vloñsad en e skoaz*). Trible ! pa oan-me da oad ! (Eur stlakadenn zeh gand e deod, hag eñ kuit er-mêz, o tridal gand al levenez).

II

Lom

(*E-unan*).

Ha setu-me gwall-nehet adarre ! Ken na zao riou em horv hag eo krog ar hrenerez ennon. Hebdale e vo-hi amañ dirazon. Biskoaz ne gredin diskleria dezi pez am-eus da lavared. Red-mad eo koulskoude. Dre forz dalea ha gortoz kaoud war e hent eur goantenn, eur vaouez kaerroh ha gwelloh evid ar re all, e troer da baotr yaouank-koz... Re wir eo : ma choman bloaz all c'hoaz va-unan e vin re ziwezad... O ! Katellig Skragn Kergidavreg n'eo ket mui eur plah yaouank en he bleuñ kennebeud : n'eo ket euz ar re goanta, anad eo, med eur peziad maouez eo-hi, liou ar yehed warni, ha labouruz, ha spered dezi ar pez zo ezomm. Petra hellan soñjal kaoud gwelloh ? He fenn he-deus avad, a lavar gwall deodou ar barrez... Ba ! me ouezo ober ha lakaad anezi da blega ha da zenti pa vo red... Evelato n'am-eus biskoaz goulenet maouez ebet... Gand ma ne bakin ket va zah !... Aiou, va fenn ! (*Eva ra eur skudellad dour*). Dao din dimezi koulskoude. Setu me krog gand va femp bloaz-ha-tregont, ha klañvidig e-giz m'emaon : lamm-kalon evid an disterra tra, poan en va hein pe en va divorzed a beb eil, diouz ma houziz pe ma amont¹ an avel, poan-gov hag all, bep tro ma stok va genou ouz eur werennadig lambig... Dalhmad eun dra bennag o lakaad an nervennou da vervi ennon : e-giz bremañ, sellit, krena 'ra krohen va lagad dehou, hag e santan evel spillou-tan en va bruched, aze... oiou ! Ha, pez a zo gwasoh c'hoaz, n'on ket evid kousked eun nozvez war ziou. A-veh ma vezan gourvezet en va gwele, youp ! e-giz eun taol-kontell o vond diouz va bronn dehou en va skoaz kleiz hag o sevel din tre beteg va fenn. Evel eun tenn, setu me neuze 'mêz va gwele hag o vale en noz dre an ti. Pa zoñj din eo brevet da vad va nervennou, e hourvezan adarre etre va liñseriou, ha youp ! an dro-mañ eo en va skoaz dehou eo e santan eun taol-kontell o vond en va hostez kleiz hag o tiskenn da vrouda din va fenn an traoñ. Ha nozveziou zo e c'hoarvez an abadenn-ze eun ugent gwech bennag !... Ma ! n'eus ket da dorta : dao eo din dimezi, kaoud eur wreg da ober war va zro, hag eur geginerez vad diouti. Ar medisin en-deus lavaret din debri traou dous ha dre lêz da derri din nerz va nervennou ha da zistana va gwad. Traou evel (o *konta war e vizied*) pouloud, fars pitillig, stripou Kerne, krampouez-logod, bara ranig pe c'hoaz bara-mouchenn... Me gav din e ray Katellig an afer mad-tre (*Trouz bouteier-koad er-mêz*). Ou, la ! setu-hi o tond... Ay, va halon !...

¹ amont : ar hontrol euz "gouziza" (euz ar galleg).

III

Katell

(*O tond tre*).

A ! c'hwi an hini eo, Lom Bouzellog ? Ha va zad hag a lavare din : « Kerz 'ta da weloud en ti : eur marhadour n'ouzon ket petra 'zo eno, deut da ginnig eun dra hag a blico kenañ-kenañ dit hervez va zoñj ». Demad atao, Lom Toull-ar-Gurun.

Lom

Demad dit, - deoh, Katellig Kergidavreg.

Katell

Digarezit ahanon da veza daleet eun tammig. Oh ober war-dro va moh bihan e oan... Med, lavarit din, Lom Bouzellog, perag an diaoul oh chomet keid all hep dont beteg an ti ? Ne weler ket mui ar skeud ahanoh tro amañ... Azezit 'ta. Gand mern-vihan e chomoh, 'michañs ?

Lom

Nann, trugarez ; n'on ket boaz da zebri tra etre mern ha koan.

Katell

Pegen kaer an amzer hirio, neketa ? N'eo ket evel deh. Nag a hlaor a zo bet. Ken m'o-deus ranket an dud chom en ti e-doug an deiz. Labour awalh a zo koulskoude gand ar foenn da droha... Med, pa zoñjan, fichez oh hirio, Lom Toull-ar-Gurun. Petra hoarvez ganeoh ? Daoust hag emaoh o vond d'eur fest-noz bennag da zañsal, en abardaez-mañ ? Heb ober fougeou deoh, Lom, tenna 'rit d'eun den-tre er hiz-se.

Lom

Katell Kergidavreg, me a garfe e selaoufes... e selaoufeh ahanon... Eun dra a-bouez braz am-eus da zisklêria, da ziskuilla deoh. Marteze e teuy ar souez deoh, marteze zoken e savo droug ennoh, dre m'am-bo bet kredet... Hum, setu... (*Outañ e-unan*) Oy ! ar hrenerez adarre !

Katell

It ganti 'ta neuze, Lom Bouzellog. (*Lom a chom dilivar*). Ahanta, petra 'zo ?

Lom

Ya, mad, ne vin ket pell... N'emaoh ket heb gouzoud, dimezell Katell, - en em anaoud a ra on diou farnill abaoe eur viken. Va zad-koz-me hag ho tad-koz-c'hwi a zo bet mignoned a viskoaz. Skragned Kergidavreg ha Bouzelleien Toull-ar-Gurun, dalhmad ez eus bet darempredou difachiri etrezo, e-giz m'eo dleet etre amezeien vad. Rag amezeien om : beza zo lod eus on

douarou stok-ha-stok : e ouzoh mad, eun tamm douar-lann am-eus du-ze, e Lost-ar-Hoad, harp d'eur waremm deoh.

Katell

Digarezit ahanon. C'hwi lavar : « Eun tamm douar-lann am-eus e Lost-ar-Hoad. » Petra 'fell deoh lavared ?

Lom

Feiz ! eur horn euz va douar-lann e Lost-ar-Hoad a zo stok ouz ho kwaremm-c'hwi. Ha n'eo ket ar wirionez ?

Katell

A gav deoh marteze. An tamm douar-ze avad, n'eo ket deoh, med deom-ni.

Lom

Ahanta, dimezell Katell, ha bez' e komzom euz ar beskell a zo e Lost-ar-Hoad etre Gwaremm-ar-Menez hag ar Hoad-Pin ?

Katell

Ya, dres, etre Gwaremm ar-Menez hag ar Hoad-Pin, e Lost-ar-Hoad.

Lom

Ma ! din-me eo ar beskell a netra-ze, evel m'eo din ar Hoad-Pin e-unan, aze n'eus douetañs ebed, Katell Kergidavreg.

Katell

Setu amañ traou nevez avad. Hag abaoe pe da vare eo deoh c'hwi beskell Lost-ar-Hoad, Lom Bouzellog ?

Lom

Feiz, dalhmad eo bet d'am zud... Ha n'eo ket dre ma ne dalv din da netra ar hoz tachennad douar seh-se eo ne chomo ket war va ano.

Katell

Asa, paotr, fazia rit !

Lom

Paperiou a zo, kement ha ma karin, da broui eo din-me. Gouzoud a-walh a ran ez eus bet trouz ha rendaelerez, gwechall-goz, war zigarez an dachennig-douar-ze ; med bremañ e oar kement hini eo din-me. N'heller ket lavared ar hontral. Klevit mad ahanon. Tad-koz va zad en-doa roet koñje da nized tud-koz ho mamm da leskel o zaout da vond da beuri war ar waremm-ze. Da houde-ze, Lan Vozeg koz a zalhas da gas e zaout dre eno beb an amzer, e-pad eun ugent pe eun daou-ugent vloaz bennag. Ken na deuas moarvad da gredi e oa dezañ an tamm douar. Ha pa zigouezas d'ho mamm, goude maro

Lan Vozeg, kaoud lod en e vadou, e kredas-hi iveau marteze e oa beskellenn Lost-ar-Hoad dezi evel ma oa Gwaremm-ar-Menez. Koulskoude, anad eo diwar ar paperiou am-eus du-mañ...

Katell

N'eo ket tamm ebed en doare-se ema an traou, Lom Toull-ar-Gurun ! N'eo ket hepken tonton Lan Vozeg hag en e raog nized tud-koz va mamm, med tad ha' tad-koz ar re-mañ hag a zelle ouz beskell Lost-ar-Hoad evel ouz lodenn bella Gwaremm-ar-Menez, - nemed eur hoz kleuz hanter freuzet a zo etre ar waremm hag ar beskell. N'eus ket da uza teod diwar-benn an dra-ze, ha souezet on, Lom Bouzellog, pa welan ahanoh oh ober eur reuz ar mil diaoul evid ...

Lom

Diskouez a rin va faperiou, Katell Skragn Kergidavreg.

Katell

O klask ober goap emaoh, paotr ! Penaoz 'ta ! Setu en tu all da dri-hant vloaz m'ema ar beskell-ze e-touez madou ar Skraged, - ha c'hwi o tond da lavared n'eo ket deom ! War va feiz, Lom Bouzellog, ne gredan ket re va diskouarn... N'eus ket da lavared e talv eur gwall dra an tamm douar-ze. E gwirionez ne gav ar zaout hag an deñved ennañ nemed eur begad peuri seh bennag etre ar bodou lann koz, hag e rofen anezañ d'an neb a garfe evid nebeutoh eged kant skoed. Med deom-ni eo ha n'on ket evid anduri e vije sellet outañ e-giz ha pa ne vije ket. Ne andurin ket, a lavaran deoh, na ne rin !

Lom

Selaouit ahanon, me, ho ped. Bugale nized tad-koz ho mamm...

Katell

Nized bugale mamm va zad-koz, pe bugale tad-koz nized va mamm... Me n'entenan ket eur seurt en ho rimodell. Ne gomprenan nemed eun dra : ar beskell a zo deom-ni.

Lom

N'int ket, din-me int.

Katell

Deom-ni, a lavaran dit. Bez' e hellfes chom aze daou zevez all da hlaourenni, ha klask diskouez din eo da dra-te, ha dont amañ deg gwech all gand eur harrad paperachou koz, hag eun noter, ha testou, beb a chupenn lost-pig a-istribill ouz o hein e-gizdout-te, ar parkad douar-ze a zo deom-ni, deom-ni e chomo, ha peoh gantañ pelloh ! Ne garfen ket kemer eur spillenn diwar madou va nesa, med ne faot ket din e ve paket eur blouzenn diwar va danvez-me. Evel-se eo emaon.

Lom

Evid lavared gwir, Katell Skragn Kergidavreg, ar beskell-douar netra-ze, n'on ket nehет gantañ e mod ebed, n'on ket ken stag-se outañ, hag e roan anezañ

deoh a galon vad, pa blij deoh kement-se. Ar pez a lavaren, da zifenn va gwir e oa, tra ken.

Katell

Feiz, nann avad, n'out ket nehet tamm ebed ! Setu-te o kinnig din ar pez a zo din dija !... Gwall zouezuz e kavan an doare ganit, Lom Bouzellog. Kent ha bremañ on-doa sellet ouzit evel ouz eun amezeg mad. Warlene on-eus bet prestet dit on dornerez, goude beza prestet or falherez, pa oa direñket da hini, hag ouspenn eur wech 'peus bet kirri ha kezeg an ti-mañ evid mond da gerhad treustou, ha pleñk, ha mein, d'ar mare ma oas o sevel da graou nevez. Hag, e-giz bennoz Doue, setu-te o tond da hoarzin goap ouzin amañ...

Lom

Ata ! merh ar Skragn, lavar 'ta dioustu kement hag ober ez eus eul laer ahanon. Dit da houzoud koulskoude, n'am-eus Morse en va buhez kemeret tra ebed digand den, ha ne houzañvin Morse, kleved a rez, Morse, beza tamallet pe da skrapa dre nerz, pe da flipa dre guz, eur geuneudenn diwar zouar ar re all. (*Diskenn a ra eur mell banne dour er werenn a zo dirazañ hag e kas anezañ d'an traoñ en eun taol*). Ha n'eus ket da glask pemp pao d'ar maout : tachenn-douar Lost-ar-Hoad a zo din.

Katell

N'eo ket gwir. Deom-ni an hini eo.

Lom

D'in-me.

Katell

Me a ziskouezo da gement pabor 'zo egisdout da biou eo : hirio, n'eo ket warhoaz, hirio e vo trohet al lann e Lost-ar-Hoad.

Lom

Petra, petra ?

Katell

Ya, bremaig-touchant e vo kaset tud di da droha ar bodou-lann eiz pe zeg vloaz a zo eno.

Lom

Me o haso kuit.

Katell

Ne gredi ket ober.

Lom

(*Sonn war e dachou hag ar gounnar o starda dezañ e zaouarn war e vruched*).

Eo ! me o haso kuit, hag e laoskin va chas war o lerh.

Katell

Arabad dit gwihal e-giz-se. M'emaout da veza paket gand eur gaouad araj, ra vo mēz an ti-mañ da vihanna. Keit ha ma chomi amañ avad, arabad dit ober kement a dalabao hag a cholori.

Lom

Ma ne vije ket bremañ va halon o haloupad ennon e-giz ma ra, ma ne vije ket va fenn war-nes tarza, e lavarfen dit meur a dra (*oh hopal a-daol-trumm.*) Bez' e lavarfen dit eo ar beskell-douar-ze din-me.

Katell

(*Ken kreñv all*). - Ha me, e respontfen dit eo deom-ni.

IV

Stefen

(*O tond en ti*). - Petra zo ? Petra hoarvez ganeoh, p'emaoh ho-taou o youhal evel-se ?

Katell

Va zad, lavarit 'ta da hemañ, an aotrou-mañ, da biou eo ar beskell-douar a zo e Lost-ar-Hoad, etre Gwaremm-ar-Menez hag ar Hoad-Pin : dezañ, pe deom ?

Stefen

(*Da Lom*). E feiz avad, deom-ni eo, va faotrig ker.

Lom

Digarezit ahanon, Stefen Kergidavreg. Abaoe pegeid amzer eo deoh-c'hwi ? Soñjit ervad, c'hwi, da nebeuta : tad-koz va zad en-doa roet koñje da nized tud-koz ho kwreg da gas o zaout da beuri e Lost-ar-Hoad hag an dud vad-se o-doa kemeret ar boaz da houde da zelled ouz ar waremm-mañ eun tammig evel ha ma vije bet dezo e gwirionez. Ha neuze...

Stefen

Digarezit ahanon d'ho tro, va mignon. Dizoñjal a rit penaoy ma ne baee netra an dud vad-se d'ho tad-koz...

Lom

Nann, da dad-koz va zad.

Stefen

Ya, lakaom, da dad ho...

Lom

Nann, da...

Stefen

Kaer ho-po, lavared a rin ar pez am-eus da lavared. Ma ne baee netra nized tud-koz va gwreg eo dre ma oa savet tabut, pell a oa, etrezo hag ho tad-kuñv, pe ho tad-you, me oar-me, diwar-berm gouzoud da biou oa ha da biou n'oa ket beskell Lost-ar-Hoad. Bremañ avad e oar kement hini er harter eo deom-ni. Ouspenn-ze n'eus nemed mond da weled en ti-kêr d'ober.

Lom

Me a ziskouezo deoh sklêr evel an deiz eo din. Paperiou am-eus a laka anad eo din-me.

Stefen

Bez' e helloh diskouez ho paperiou ! Eur zahad koz traou didalvez, va hamalad.

Lom

Gwelet e vo, Stefen.

Stefen

Forz penaoz, n'eo ket gant safari evel bremaig eo e teuoh a-benn da broui oc'h perhenn da Lost-ar-Hoad. Ha klevit mad, paotrig bihan, ma talhit da gonta eo deoh-c'hwi an dirienn-ze, e vo lakaet e gwerz ganin-me.

Lom

E gwerz ganeoh ?

Stefen

E gwerz ganin, ya !

Lom

Oh ober goap emaoh, Stefen.

Stefen

Piou an hini a zo oh ober goap ouz egile, amañ, me houlenn ? Gwall zivergont e kavan ahano, den yaouank. Me n'on ket boaz e ve respontet din ken dichek gand marmoused eus hoh oad.

Lom

E feiz avad, Stefen goz, c'hoant ho-peus lakaad ahanon ken sod hag eur bugel bet ganet deh. Setu-c'hwi o lavared eo deoh ar pez a zo din e gwirionez, hag e karfeh e talhfen da varvaillad ganeoh war va fouezig evel ha pa ne zeufe 'mêz ho kenou nemed komzou fur ha leal ! N'eo ket evel-se eo e reer etre amezeien vad. Eun amezeg souezuz an hini oh, Stefen Skagn, eul liver-gevier, ya, eul liver-gevier...

Stefen

Hañ ? Petra 'peus lavaret ?

Katell

Ma vijen c'hwi, va zad, e kasfen bremañ-dioustu tud an ti da droha al lann en tamm douar-ze.

Stefen

(*O vond da Lom*). - Lavarit 'ta eur wech all...

Lom

Me a lavar deoh ho-po kelou diouzin-me heb dale pell. Barnerien a zo e Kemper...

Stefen

Aze e weler mad piou oh : setu kavet ganeoh eun digarez evid sevel prosez adarre. Heñvel-put ouz ho tad, tremenet gantañ e vuhez o tua paper-timbr, ha dalhmad o klask c'hwen e loerou ar re all. Tenna rit da dud, ho famill, ha ya 'vad !

Lom

Difenn a ran ouzoh dismengañsi va famill. Va zud-me n'eus bet Morse en o zouez a foultr-e-stal evel ho preur Saik Godell-doull a zo bet ranket lakaad foar warnañ ablamour d'e zleou...

Stefen

O, bez' e hellit fogasi, c'hwi, gand gouenn ar Vouzelleien ! M'en dare ped anezo a zo eet da chom en ospital ar re-sod !

Katell

Ya, en ospital ar re-sod !

Stefen

Hag ho tad-koz, Yann Gourlañcheneg, hag a veze gwelet bemdez goulou o ruza er foziou gand e reoriad. Hag ho tonton Fañchig, lesanvet Lonk-e-werenn, dre m'en-doa kemeret skouer re vad diwar e dad, hag a lipas peadra e hini goz dindan tri bloaz. Hag ar yaouanka euz e verhed, ar galkenn-ze, daoust ha n'eo ket hi eo he-deus lakaet, gand he buhez diroll, an dizurz da ren e meur a di dre amañ ?

Lom

(*Hanter vouget*). - Ha c'hwi, boulom koz, daoust hag ho mamm, diouz m'am-eus klevet konta... (*Outañ e-unan*). O ! al lamm-kalon... hag an taboulinou a glevan en va diskouarn !... (*Uhel, o youhal*) Dour ! eur werennad dour !

Stefen

Sellit 'ta ouz ar hrak-aotrou-mañ, gand e galon dimezellig ! Ar hovou braz evel an hini a zougez-te ne dalvont netra d'eur gwaz, mab ar hagn n'eus nemed gwad panez e-barz !

Katell

Tarza 'ray gand ar vez ! Ha koulskoude n'eus ket bet digaset da zoñj dezañ e voereb all, Jani Fri-butun, ar strakell goz-se hag a...

Lom

(*Outañ e-unan*). - Ne zalhan ket ken war va garr gleiz... (*A vouez uhel, da Stefen*) : Eur fistouler koz n'oh ken, hag eun trubard, prest atao da laerez fiziañs ho prasa kamalad evid c'hoari dezañ eun taol-judas da houde. Pa zo bet kaoz da... (*Outañ e-unan*). Va daoulagad ne welont ket hanter ken, va breh dehou a zo evel maro... (*A vouez uhel*) Va zog, en an' Doue, va zog, buan !...

Stefen

Ya, poent eo deoh mond kuit, loidig² fall, amprevan, haillon, flêrier, poent eo deoh ma n'ho-peus ket c'hoant kaoud va botez en ho pragez termaji !

Katell

Ha redit buan da weled barnerien, alvokaded hag ucherien Kemper gand ho panerad paperiou. A ! A ! A !

(*Lom a red kuit er-mêz*).

V

Stefen

Kerz gand an diaoul, lorgneg, koz urupaill, kov-yod !

Katell

Pebez loen fall ! A, ya bez' e heller fizioud en amezeien !

Stefen

Sklankenner ! Ribler ! Laer gagn !

Katell

Ma n'eo ket mez ! Lipa madou an dud all, c'hwenna dezo o godellou ha dond c'hoaz da houde d'ober al lu ganto, en o zi ! (*O c'hoarzin*). Paket en-deus e begement avad, hag eet eo kuit losteg, flêr en e loerou.

Stefen

Bern teil ma'z eo ! Ha pa zoñjan e oa deut hennez amañ, komzou flour en e henou ha manegou gwenn en e zaouarn, d'ober e houllenn !

² loidig : flêriuz.

Katell

D'ober e houlenn ?... Peseurt goulenn, va zad ?

Stefen

Feiz, eur goulenn-dimezi. C'hoant en-doa, an aneval louz zo anezañ, c'hoant en-doa fortunia ganit.

Katell

Fortunia ganin ?

Stefen

Ya, al labaskenn, ar hov gwag-se, deut e oa, sañset, da houllenn ahanout da bried dezañ.

Katell

Da houllenn ahanon... Me... da bried dezañ ?... (*Koueza ra war ar skaon hag en em laka da hirvoudi.*)

Stefen

Ata ! Petra hoarvez ganit ?

Katell

Galvit anezañ en-dro... galvit anezañ en-dro... Buan, buan !

Stefen

Piou 'peus c'hoant a vije galvet en-dro ?

Katell

Heñ, heñ, Lom Toull-ar-Gurun !... A ! fallaad a ran ! Galvit anezañ en-dro ! Semplet on !

Stefen

Penaoz e kav dit e hellfen, goude ar pez a zo bet bremaig...

Katell

Prest on da verval... Degasit anezañ amañ, pe eo echu ganin...

Stefen

(*O starda e benn etre e zaouarn*). - O tad dinatur ma 'z on ! Bez' e tlefen en em grouga, pe, d'an nebeuta, en em veuzi.

Katell

A ! mervel a ran. Hastit afo ! Degasit anezañ en-dro !

Stefen

Mond a ran, mond a ran ! Arabad dit gopal e-giz-se ; gortoz ! gortoz ! (*Mond a ra mêz, tiz warnañ, hag e klever anezañ o hervel Lom*). Lom Bouzellog, O !

VI

Katell

(*O tond enni heh-unan*). - Petra on eus-ni greet ?... (*Droug enni*). Perag ive n'en-deus ket va zad lavaret dioustu pez a oa deut hennez da ginnig din ?... Daoust hag e faoto dezañ kemer ahanon da bried bremañ ?... O ! Lom Bouzellog n'eo ket mui eur paotr yaouank flamm, med fortun vad 'zo gantañ : sellet e vez outañ evel unan euz brasa juloded ar barrez. Yehed dister a zo dezañ, diouz e gleved, atao poan amañ, poan aze, med an dra-ze n'eo nemed ardou ha simillou, e nervennou o labourad : me ouezo lakaad anezañ war e du mad ha reiza dezañ e imor. Kintuz eo, douget atao da glemmichad evel eur vaouez koz, ha loarieig war ar marhad, ma 'z eo gwir kement a lavar an dud : med n'eo ket ganin-me e c'hoario e benn bihan !... Ma karfe labourad muioh gand e gorr braz, e wellafe dezañ eun tamm mad... Med, da houzoud eo, perag 'ta ez eus savet c'hoant dimezi da vestr Toull-ar-Gurun, bremañ, eun tammig war ar hoz, rag ne dle ket beza pell ken moarvad diouz e zaou-ugent vloaz ?... Piou 'oar ? marteze c'hoant gantañ kaoud eur vaouez da ober war e dro, da veza moumounet ganti e-giz eur bugel ha dreist pep tra, evitañ da gaoud eur geginerez a ray dezañ e zeiz bolontez ? Rag an aotrou Lom a zo figuz : ar merhed a oar pep tra, ha me 'm-eus klevet ne zebr nemed traou dous ha dre lêz, en abeg d'e yehod fall, e lavar, evel ha pa hellfe beza klañv e gwirionez eun trohad den eveltañ !... Ma, fazia a rit, paotr paour, ma kav deoh e tremeno an traou evel-se ! Pa vin mestrez an ti e Toull-ar-Gurun, e vo boued druz ha kreñv war an daol, ha n'eo ket lipouserez : kig-sall, patatez, yod-kerh, eur boued stard ha fetiz, greet evid tud a boagn en o micher hag o-deus c'hoant chom beo ha stag o zreid ouz an douar... A ! Lomig Bouzellog, eur vaouez eveldon eo ho-peus ezomm abaoe pell 'zo, eur vaouez a ouezo an tu da zioullaad deoh ho nervennou ha parea ahanoh da vad diouz ho remm hag ho poaniou-red, hag a zesko deoh penaooz kaozeal... Gortozet ho-peus beteg bremañ evid dont da houlenn ahanon : me a dalvezo deoh an dra-ze, paotrig bihan !... (*Nehet*). Daoust ha dont a ray en-dro avad ? Gwall bell e chomont... (*Trouz er-mêz*). A ! setu tud o tond... (*Stefen a zeu tre*).

VII

Stefen

Setu-eñ ! Ra 'z ay gand an diaoul-ruz ! Lavar dezañ ar pez a gari hag en em glev gantañ mod a gari : din-me ne fell ket ken chom e-kreiz etrezoh ho-taou.

Katell

Peleh ema ? peleh ema ?

Stefen

'Ma o tond war va lerh, a laran dit !... A, spontuz eo kaoud eur verh da zimezi !... Lavaret on-eus a bep seurt d'an den-ze, ha lakaet anezañ da dehoud kuit gand ar vez... ha kement-se dre ma 'peus bet klasket...

Katell

Dre m'am-eus bet klasket, me ?

Stefen

Ahanta, dre va faot-me an hini eo ? Daoust ha n'eo ket te an hini he-deus... (*An nor a zigor*). Eñ eo... poent eo din kas va zreid pelloh. (*Mond a ra mêz*).

VIII

Lom

(*O tond tre, dislivet ; outañ e-unan*). Va halon o taoulammad... Va diskouarn o taboulinad...

Katell

Tommel eo bet deom eun tammig bremaig, Lom Bouzellog. Pardonit din ! Deut eo din ar zoñj en-dro : deoh-c'hwi eo an dour-lann~ze e gwirionez.

Lom

An douar-lann-ze ? A, ya !... an douar-lann ! (*Outañ e-unan*). Ha va daoulagad hag a zo paket ive !

Katell

Ya, parkadig Lost-ar-Hoad a zo deoh : deoh-c'hwi an hini eo !... Azezit 'ta ! Ni eo a oa faziet.

Lom

Va Doue, ne oa ket peadra ober reuz gand ken nebeud a dra. Ne oa nemed da zifenn va gwir eo e lavaren deoh...

Katell

Mad, klevet eo. Ha bremañ, daoust ha n'hallfem ket kaozeal euz traou all ?

Lom

Digaset em-bije bet deoh ar paperiou a ziskouez ken sklêr hag an deiz en-doa tad-koz va mamm, n'eo ket, tad-koz va zad, roet koñje d'ho mamm-goz, n'eo ket, d'ho mamm-guñv, da lavared eo da...

Katell

N'eus ket forz ! Akord om war gement tra... (*Outi heh-unan*). Penaoz lakaad anezañ da ober e houllenn... (*Da Lom*) : Ha soñj a zo ganeoh mond da gonkour Landerne gand ho kezeg, Lom Bouzellog ?

Lom

E soñjal mond e oan, ya, sur, Katell Kergidavreg, gand va hazeg Baill. Ne vin ket evid mond bremañ, avad... Dichañs am-eus : n'ouzon ket petra 'zo c'hoarvezet ganti, med savet 'zo goriou dezi en he sol.

Katell

Dichañs eo deoh, sur. Penaoz eo erruet ?

Lom

En em hloazet heb gouzoud din, pe piou 'oar, paket ganti eun tach bennag, hag eo deut da hori. N'hall ket mond 'mêz ar gêr evid ar pred. Kerse eo din ! Eul loen ken kaer, a vefe eet ar priz kenta ganti sur a-walh e Landerne.

Katell

A gav deoh, gwir, Lom Bouzellog ?

Lom

Ar priz kenta a lavaran deoh, ha ne fazian ket ! Gwelet ho-peus ar gazeg-se o labourad liez gwech, Katellig Skragn. Daoust ma ne vez ket gwall ampart ar merhed da briza ar hezeg, lavarit din evelato peleh ho-peus bet gwelet kreñvoh ha kaerroh loen egeti ?

Katell

N'on ket gouest a-walh da varn ar hezeg, me, a gred deoh ? Eur mell fazi eo deoh adarre, Lom Toull-ar-Gurun... Red eo deoh gouzoud : me, n'on ket euz ar seurt merhed-se ha n'anavezont tra en tu all d'o zi, d'o yer ha d'o amann : me, amañ, a wel pep tra hag a oar diouz ar hezeg kerkoulz ha diouz ar saout... Ha c'hoarzin a rankan pa glevan ahanoz o kana ken braz meuleudi d'ho kazeg Baill... Petra ne hellfem ket lavared, ni, neuze, diouz an Hini Hell a zo er marchosi amañ ?

Lom

Hoh Hini Hell dreist d'am Hini Baill, an dra-ze marteze eo a fell deoh lavared ?... A ! feiz avad !

Katell

Ya, dreist, sur !... Eun tammig yaouank eo c'hoaz, mez pa vo greet he memprou da vad ganti... me 'lavar deoh ne vo ket eur gazeg frammet koulz hag hi dre ar vro-mañ...

Lom

Re striz he bruched, da genta...

Katell

Ha muzulet ho-peus he bruched evid lavared eo strisoh eged bruched hoh Hini Baill ?

Lom

Bez' e hellfem muzulia, ma karoh...

Katell

Ha neuze, an Hini Hell amañ, gouenn zo enni... He mamm a oa Finetig, on-eus gwerzet warlene da Chob Landi, a vez, evel ouzoh, o prena kezeg dre amañ evid roue bro-Saoz... E-leh ho Paillenn, he frenet ho-peus digand eun trafiker laer bennag ha n'oh ket evid gouzoud a beleh e teu pe ne deu ket...

Lom

Ne rofen ket anezi deoh evid pemp loen evel hoh Hini Hell, a zo eur gazeg, ne lavaran ket fall-fall, med euz ar seurt a gaver a-zousennou.

Katell

Evelato, Lom Bouzellog, c'hwi a zo eun den re labouret gand ar c'hoant dislavared ar re all ha kaoud atao gwelloc'h pe vravoh egeto. Bremaig e soñje ganeoh e oa deoh douar lann Lost-ar-Hoad. Ha bremañ e fell deoh lakaad ho Kazeg Baill dreist d'an Hini Hell amañ ! Ha pa ouzoh mad koulskoude e talv or Hell-ni deg gwech kement hag eul loen evel hoh-hini.

Lom

Diouz a welan, Katell Skragn, e kav deoh n'on ket gouest d'anaoud eur marh sod diouz eul loen reiz... Evelato, n'eus den tro amañ ha ne oar ket eo ho Kazeg Hell spontig evel eun torad koulined...

Katell

A ! an dra-mañ n'eo ket gwir avad !

Lom

Anavezet eo koulskoude gand ar barrez a-bez.

Katell

N'eo ket gwir, n'eo ket gwir !

Lom

Arabad deoh fulori e giz-se, dimezell Katell.

Katell

Ha c'hwi, chomit 'ta hep distaga sotoniou ! Spontus eo ! Kredi lakaad e-skoaz eur gazeg yah ha gallouduz evel hini an ti-mañ gand eun tamm loen fall evel hoh-hini, gouest hepken da stleja eur harr goullo.

Lom

Da stleja eur harr goullo !... O ! n'on ket evid chom pelloh da gleved ahano !... Adarre al lamm kalon, adarre an daboulinadeg !...

Katell

Dleet 'oa deoh chom hep choual kemend-all !

Lom

Dre druez, Katell, chomit peoh. Tarza ray va halon ha va fenn !

Katell

Chom peoh ne rin ket, ken n'ho-pezo anzavet pez a zo ar wirionez : e talv va Hini Hell ugant gwech kement hag ar hoz bided fall a zo e marchosi Toull-ar-Gurun.

Lom

Kant gwech nebeutoh eo e talv. Ra greuñvo mik al lastez kazeg, ar galkenn, al loen louz !... A ! va daoulagad !... A ! va fenn !

Katell

Ho loen-c'hwi n'en-deus ket da greuñvi : hanter vrein eo dija, eur hagn flériuz n'eo ken !

Lom

En an' Doue, tavit, tavit ! Pa lavaran deoh ema va halon ha va fenn o vond da darza !

Katell

Evid tevel ne rin ket, kamalad !

IX

Stefen

(*O tiredeg en ti*).

Petra hoari ganeoh ? Eet ar moh en ed-du adarre ?

Katell

Va zad, respontit din, frêz ha didro : pe loen an hini brava, an hini starta an hini galloudusa, ar Gazeg Hell amañ pe al loen Baill a zo e Toull-ar-Gurun ?

Lom

Stefen Kergidavreg, me ho ped : ha n'eo ket va Hini Baill eun tammig ledannoh, digorroh he bruched eged hoh Hini Hell ?

Stefen

Ha pa vefe ? petra vern ? An hini Hell amañ a chomfe memeztra brava kazeg ar hornad.

Lom

Goude an Hini Baill, eveljust, n'eo ket 'ta ?

Stefen

Va faotrig bihan, distanit eun tammig, ha selaouit ahanon. Ho kazeg Baill, meur a dra vad a zo enni a-dra-sur : mentet ha mempret brao, eur jao eo a hell plijoud... Koulskoude, red eo deoh anzav eo dija kosoh eged an Hini Hell amañ, hag an dra-ze evelato a gont eun tamm bennag...

Lom

Gortozit eur pennadig, Stefen goz... Greom evel ha pa ne vefe ket al loened-se, unan din hag an hini all deoh-c'hwi... N'oh ket evelato hep gouzoud petra 'zo bet emgavet pa 'z eo bet an Hini Hell el Lanneg evid difontadeg gwarimier Yann Gergelen, a-unan gand va Bailleuz-me ha kezeg an amezeien. Red eo bet disternia anezi diouz an alar braz, c'hwi 'oar mad, pa ne ree nemed pennfolli, ha torret he-dije bet ar sugellou pe, mahagnet al loened all, panefe eo bet distaget.

Stefen

Ya, moarvad !... Ar mevel yaouank 'm-oa kaset ganti en-doa roet eur roustad dezi en hent, en abeg moarvad m'en-doa ranket mond d'an difontadeg an deiz-se e-leh da foar Merzer da weled e garedig, evel ma oa e soñj ober. Hag eñ eo a oa bet lakaet da vleina ar hezeg. N'eo ket souez eta ma sponte eun nebeudig al loen en e gichenn.

Lom

Ar pez 'zo sur, eo bet lakaet loen Ivonig Pennsivi en he leh, ha n'eus ket bet ranket disternia va Hini Baill.

Stefen

Gevier, gevier tond ! Va hamalad bihan, santoud a ran eo kalz gwelloh deoh kaozeal euz traou all. Peotramant ez eus traou, sellit, hag a larrafen deoh...

Lom

Ha me ive ez eus traou zo a zigasfen deoh da zoñj...

Katell

Kit 'ta ! Arabad deoh derhel war ho teod fall : dibunit deom eul lostad gevier all...

Lom

Eo, derhel a rin war va zeod, rag ema adarre al lamm-kalon...

Katell

A ! ya, ho kalonig paour !... En eur gador vouret eo ema ho plas, e-tal an oaled, gand eun tasad lêz tomm en ho kichenn, evel eun tad-koz debret gand ar remm !

Stefen

Gwir eo, ha re wir ! Paour-kêz denig paour, gand e galon dalhmad o vond da darza, hag e ziskouarn o voudal outañ !... Hag e faot dezañ c'hoaz dond d'ober fouseou dirag an dud en o zi !... Eul labourer-douar, c'hwi ? Eun den euz ar vicher da zevel loened ?... A ! A ! Pa oar oll dud ar harter ne zalhfe ket stal Lom Bouzellog en he sav panefe ar chañs en-deus da gaoud eur mestr-mevel evel Cheun Gamin, ne chom feal d'e di nemed dre m'eo re goz evid mond e leh all... rag evid ar pez a vez paeet !...

Lom

Petra ? petra 'faot deoh lavared ?

Stefen

Ya, ya, ma hellfe Yann Toull-ar-Gurun, ho tad, gouzoud petra eo deut e bennhêr ! Goude beza labouret e-doug e vuhez da zastum madou dezañ, e vefe stad ennañ moarvad o weled e vab o c'hoari ober e aotrouig : o vond da zigas e arhant da gement medisin a zo e Kemper pe e Brest, war zigarez beza klañv, sañset, e leh terri e gorv eun tammig war al labour, evel ma ra kement den zo dre amañ...

Lom

Me ?... me ?...

Stefen

Ya, c'hwi, c'hwi ! Re izel eo deut an douar evidoh abaoe m'emaoh o klask dreveza ar juloded... An aotrou-mañ a ya da chaseal, mar plij, gand noter ar barrez, ha gand ucher pe archer...

Lom

Da nebeuta, chaseal eo a ran-me, ha n'eo ket lakaad lasou-kroug evel ma rit c'hwi, brigrier koz ma 'z oh !

Stefen

Lavar an dra-ze 'ta eur wech all, teod an diaoul !

Lom

Ha n'eo ket gwir e vez ar Skragn koz dalhmad o stenna lasou war gement kleuz hag e kement balaneg zo dre amañ ? An dra-ze a zo chaseal, marteze ?

Stefen

Ha ne davi ket, glabouser ?

Lom

Laerez jibier digand ar re o-deus paeet ar gwir d'o faka, setu pez ez eo !

Stefen

Lampon fall, gra-netra !

Lom

Krafer louz ! den piz ! Ano ar Skragn koz da nebeuta n'eo ket bet laeret gantañ !

Stefen

Peoh gand da henou, hañ ? pe e vi mouget ganin !

Lom

Kaoud a ra deoh e vin-me spontet ganeoh ? Goud a reer mad, pa oa beo hoh hini goz, e tapeh bahadou ganti ken aliez ha bemdez !

Katell

O, an aneval fall ! Te da nebeuta e-pefe ezomm beza strillet eun tammig gand eur vaouez ! Amprevan !

Lom

A, setu ! greet eo ganin ! tarzet eo va halon Emaon.... emaon.... (*hag e kouez war ar gador*).

Katell

O vond kuit, me lar !

Lom

Emaon o vond da vervel.... (*Semplet eo*).

Katell

Sellit 'ta ouz an aotrou, ar julod, ar chaseour ! (*Goude beza sellet outañ a-dost*). Petra hoarvez gantañ ? Va zad, petra zo c'hoarvezet gantañ ? (*O strilla anezañ, ha nehet*). E oan o lavared en-doa ezomm beza strillet gand eur vaouez ; n'ouzon ket avad peseurt vad e ray dezañ... Lom Bouzellog !... Lom Bouzellog ! Lom Toull-ar-Gurun ! Maro eo Petra on eus-ni greet ? Lahet on-eus anezañ !... (*O strilla Lom adarre*). Lom Bouzell... Lom Bouzell !... Setu-me intañvez ! (*Koueza a ra war ar gador all a-dal da Lom*).

Stefen

(*Etrezo o-daou*). Petra 'zo ? Petra 'zo erru ganeoh ? Petra 'zo erru ganit ?

Katell

Mervel a ran... Mervel a ra... Mervel a reom... (*Hanter-zemplet eo ; klemmichad a ra*).

Stefen

Dour ! dour ! Eur medisin, daou vedisin, medisined !... (*O lakaad eur werennad dour ouz muzellou Lom*). Ev 'ta, ev 'ta, gurun ! N'ev ket, eñ hag a gare kement ar gwerennadou dour ! N'evo mui biken !... O ! tad fall ma'z on ! Perag am-eus gortozet beteg bremañ evid en en em grouga, en em vouga, en em veuzi, pe en em stlepel 'barz eur puñs ! (*Lom a ra eur fiñvadenn*). A ! setu anezañ o tond endro ennañ e-unan. (*O kinnig dour adarre da Lom*). Ev 'ta, ev !

Lom

(*Abafet*). Peleh emaon ? Petra 'welan ? Petra 'zo ? (*Katell a zav he fenn*).

Stefen

Ahanta ! dimezit hag eureujit buan ha buan, ha neuze tehit kuit pell diwar va zro d'en em zrailla ho-taou ! (*Tapoud a ra krog en o daouarn ; da Lom*) : Asanti a ra-hi ! Asanti a rez-te ! Asanti a rit ho-taou ! Ho penniga a ran-me ! Ha bremañ, kit pelloh !

Lom

(*Ken abafet atao*). Petra ? Asanti a ra-hi ? Piou ?

Stefen

Ya, ya, pokit an eil d'egile, ha kuit, prim ha dillo, ma ne glevin mui trouz war va zro !

Katell

Ya, gwir eo, asanti a ran !

Stefen

Ata, ha poka a ri d'az kwreg, 'benn ar fin ? (*Katell a astenn he fenn*).

Lom

(*Goude beza poket da Gatell*). Eun den-tre oh... Med petra 'zo amañ e gwirionez ?... (*Sevel a ra*). Ay ! va fenn !... Ay ! va divesker !... O, bremañ 'm-eus soñj, kompreñ a ran ! Katellig Kergidavreg, pegen eüruz on-me !

Katell

Ha me ive a zo eüruz, Lom Bouzellog Toull-ar-Gurun !... Red eo dit avad anzav bremañ ne dalv ket an Hini Baill an Hini Hell.

Lom

Digarez ahanon, Katellig, talvezoud a ra muioh, d'am zoñj.

Katell

A, nann avad ! da benn fall a rez adarre !

Stefen

Dalhit da vond evel-se, bugale ! Med arabad deoh fizioud ken war Stefen goz evid ho tispartia ! (*Ouz an dud*) : Hiviziken, n'emellin ken diouz traou an daou bried mad-mañ ! Tra-walh 'm-eus bet klevet !... Ha bremañ, mond a reom da drinka en enor deoh, ha sal' m'en em glevoх atao evel bremañ. (*Paka 'ra gwerennou hag eur voutaill*).

Lom

An Hini Baill...

Katell

An Hini Hell...

Stefen

(*O sevel e werenn*). D'ho yehed, bugale ! Ha chañs d'ar Vouzelleien vihan gouzoud en em zifenn kerkoulz ha mamm ha tad !